

Prouiñ d'an dud ez out ur medisin



Ar mezeg
Yeun
Gourvès,
en e vurev
e Landeda.

Yeun Gourves zo mezeg e Landeda. Tro en deus bet ivez da labourat war Enez-Eusa. Sed amañ e sell war red e vuhez-vicher.

Peur out kroget gant ar vicher ?

Kroget on amañ e Landeda er bloavezhioù 1975 ha 1976. Ne oa ket aes peogwir em eus ranket en em stummañ en-dro rak ar pezh a veze desket din er skol vedisinezha zo disheñvel krenn diouzh ar vicher. Studiet em eus ar psikologiezh.

Peseurt diaezamantoù az peus kavet ?

Ne oa ket aes e penn kentañ en em wri-ziennañ amañ e Bro-Leon. Emsaver e oan, kaset on bet en toull ha laosket da vont goude-se. Ne oa ket troet an dud gant ar stourm, gant an emsav. Ret e oa din bezañ degemeret er vro, neuze e-pad seizh vloaz on bet eilmaer amañ, diwar neuze ez eus bet plas evit ar brezhoneg amañ e Landeda. Bezañ stourmer ne dalvez ket out ur medisin mat, neuze em eus ranket stagañ gant ospital an arme e Brest evit en em varrekaat ha dreist-holl evit prouiñ d'an dud amañ e oan ur medisin mat. Tapet am eus diplomoù war ar c'hrign-bev, war an hangaeoniezh, war an ambrog war-zu ar marv. Dibabet em boa neuze pleustriñ war ar yezh, un doare ivez da genderc'hel gant ar stourm.

Ne c'heller ket lavarout out ur medisin war ar maez ?

Ne c'heller ket, rak amañ e rankez prouiñ d'an dud out medisin a-raok bezañ stourmer. En em stummet on e-pad ugent vloaz en ospital an arme evit gellout bezañ degemeret gant an dud, ur paotr teknikel-kenañ on gant ur bern diplomoù war kleñved-mañ-kleñved. P'edon diabarzhad edon war Enez-Eusa, ha ne oa ket souezh gervel ac'hanon evit gwilioudiñ ur vaouez diouzh noz ha goude-se evit lakaat ur vuoc'h da velañ. War un enezenn ez eo pouezus perzh ar medisin rak galvet e vez evit n'eus forzh petra a-benn ar fin, ur gwir berzh en deus e buhez an enezenn. Met gwir eo, ar pezh a vevan hag a ran amañ e Landeda a zo disheñvel-krenn diouzh ar pezh a raen war Enez-Eusa.

Ur wech all war Enez-Eusa e oa deuet ur paotr da welet ac'hanon, poan en doa en e vrec'h. Ur wech pareet anezhañ en doa da advarrekaat e vrec'h o kigenañ anezhañ. Met war an enezenn ne oa ket aes kavout pouezioù, dreist-holl d'ar mare-se. Neuze en doa e dad kavet un diskoulm, gant un donnell e vefe graet an afer ha mat pell zo. Bep mintin pe bemnoz

en doa da zougen e donnell. A-wechoù e teu hemañ da welet ac'hanon, pa vez war an douar bras. Plijus eo rak skoulmet e vez darempredoù stank gant an dud, n'eo ket souezhus din pareañ bugale am boa graet war-dro o zud p'edont bihan.

Cheñchet eo ar vicher a gav dit ?

Sklaer, rak bremañ n'eo ket mui an hevellep kudennoù hag a-raok. Gwelout a ran amañ kalz a dud paket gant kudennoù don liammet ouzh an drammoù, met ivez tud gant soñjoù du, rak diaesterioù o devez gant an arc'hant, gant o labour, en o c'houblad, ar pezh ne oa ket kement-se ugent vloaz zo. A-benn ar fin, an dud o devez ezhomm komz ha bezañ selaouet en deiz a hiriv, ar pezh na vez ket graet kalz er vuhez pemdez.

Ne soñjez ket mont war da leve a-wechoù ?

Eo, eo ! C'hoant em befe kaout amzer evit don, evit lenn, evit skrivañ ul levr peogwir ez eo hir a-walc'h an devezhioù amañ. Ral eo ec'h echufen va labour a-raok seizh eur noz met n'eo ket aes kavout medisined evit dont war ar maez da labourat...

Komzoù dastumet gant Valérie Kervella

hangaeoniezh : immunologiezh